

# plin : Tro ar vro

*Trad. (Bretagne)*

**En attente de la partition manquante**

QR-Code du MP3



# Plin : Tro ar vro

*on ha pozioù : Lors Jouin  
Pladenn : Arzhed ar Skorf (2000)*

Selaouit 'ta mignoned (3 wech)  
Deus ar pezh a vo kanet

Bremañ deoc'h (e) vo diskleriet  
ur son nevez kompozet

diskleriet = éclairci

War sujed un tammig tro  
Ha meump graet e kreiz ar vro

meump = hon eus

Ni zo bet 'ba' kastell moan  
Ha meump gwelet ar gwenan

Ni zo bet lec'h lâre Jud  
Ha meump gwelet kalz a dud

Ni zo bet 'ba' rest an dour  
Ha meump gwelet ar chas dour

chas dour = loutre

Ni zo bet 'ba' toull ar c'hleuñv  
Ha meump gwelet ar moc'h gouez

kleuñv, kleuz = fossé

moc'h gouez = sanglier

Ni zo bet e-tal ar vered  
Meump gwelet an azened

vered = cimetière

azened = ânes

Ni zo bet 'ba' Kerbrulu  
Meump gwelet kalz a fubu.

fubu = moucheron, moustique